

Aotrou Prezidant Kuzul Rannvro Breizh,

Da heul embann disoc'hoù ar studiadenn sokioyezhoniel diwar benn yezhoù Breizh, kaset gant TMO, en deus en emvodet ar c'hevredigezhioù a labour evit ar brezhoneg, d'an 13 a viz Here 2018 e Plañvour.

Ma seblant an niver a vrezhonegerien bezañ stabil a-walc'h, e gwirionez e ya war gil an niver a dud a implij ar yezh, keidenn oad ar vrezhonegerien zo hi aet a galz war gresk, ar pezh a gas hep mar ebet war zu ur c'holl eus hanter ar vrezhonegerien en dek pe pemzek vloaz a-zeu.

Dre ar c'helenn e dremen darn vrasañ an treuzkas hiziv an deiz, er skolioù evit ar vugale, er c'hentelioù, stajoù pe stummadurioù hir evit an dud deuet. Merzhet e vez memestra e gresk en dro an treuzkas er familhoù (10 % eus ar vrezhonegerien yaouank), ar pezh a zo sin vat.

Daoust d'ar boblañs bezañ stag d'ar yezh ha daoust d'an implijoù e brezhoneg kenderc'hel da vont war-raok, betek tizhout 1500 implij, e chom treut pe treutoc'h plas ar brezhoneg er vuhez pemdez hag er vuhez foran.

War e dalaroù emañ ar brezhoneg, ha ma ne vo ket engouestlet da vat doareoù gant arc'hant ha gant tud eviti e varvo e fin ar c'hantvet-mañ. Strivoù zo bet graet er bloavezhioù tremenet, met siwazh ret eo anzav n'eo ket trawalc'h evit derc'hel bev hor yezh. Ret eo eta kemer divizoù diouzhtu ha lakaat e plas an doareoù ne c'heller ket ober hepto evit dont a-benn da saveteiñ ha da dreuzkas ar brezhoneg, dreist holl o ledañ ar c'helenn anezhi. O sellet ouzh disoc'hoù an enklask sokioyezhoniel, e ouezet emañ a-du 73 % eus ar vreizhiz ganeoc'h ma vo kelennet muioc'h a vrezhoneg er skolioù publik, prevez pe kevredigezhel Diwan.

War chouk an dilennidi, holl dilennidi Breizh 5 departamant, emañ marv pe azbevaad yezh hon hendadoù hag hor vugale, hag ur sapre atebegzh eo ! Setu perak e c'houlennomp ur gwir steuñv a zifrae, **kerkent a 2019**, o toubliñ budjed ar brezhoneg, evit mont buan davet 1 % eus budjed ar Rannvro, hag ivez :

- d'ober a-seurt ma vo doujet ouzh an emglev spesadel evit treuzkas yezhoù Breizh sinet e 2015 etre ar Stad hag ar Rannvro ;
- da zerc'hel gwelloc'h kont eus dibarderioù Diwan, o vezañ ne vezont ket meneget en emglev-mañ;
- da stagañ skoaziadoù arc'hant ar Rannvro ouzh implij ar brezhoneg ;
- da lakaat ar brezhoneg da zanvez henchañ treuz ar Breizh Cop ma c'hello pep annezad-ez eus Breizh dont a-benn da gaout ma fell dezhañ-dezhi ul lec'h da zeskiñ brezhoneg pe e brezhoneg ha bezañ gouest da implij ar yezh er vuhez, sokial, ekonomikel, sevenadurel pe c'hoazh foran ;
- da lakaat e-pleustr ar pezh a oa bet kinniget da geñver emgavioù ar brezhoneg e miz Here 2016 evit kreñvaat ar skoazell d'ar c'hevredigezhioù ha d'an ensavadurioù a labour evit ar brezhoneg.

Dalc'het hon eus soñj eus ho klozadur da zevezh an emgavioù-mañ : «... Nous prendrons notre place, nous savons que nous ne ferons pas tout tous seuls, nous ferons avec vous, ... soyez certains de notre ferme volonté et nous partageons le désir de langue que vous avez, nous allons le poursuivre et c'est un travail dont nous vous rendrons compte, régulièrement...»

O welet e tougomp ar memes c'hoant evit treuzkas ar yezh hag o welet ar stad a zifrae diskouezet gant enklask TMO e sachomp hoc'h evezh war an ezhomm a doareoù kreñv ha youlek da geñver ar politikerezh yezh nevez a vo votet gant Kuzul Rannvro Breizh e miz Kerzu.

Bezit asur eus hor youl da vont war raok asambles ha degemerit Aotrou Prezidant hor gwellañ gourc'hemenoù.

Ar re a sin :

An Drouizig	Kelenn
Ar Falz / Skol Vreizh	Kelennomp !
Ar Redadeg	Kenstroll "brezhoneg e bro Roazhon" /
Ar sklerijenn - Henbont	Collectif "du breton dans le pays de Rennes"
Arvorig FM	Kenstroll Breizh
Bak e Brezhoneg	Kevre Breizh
Bannoù Heol	KLT
Bod Kelenn	Kreizenn Sevenadurel Vreizhek Abherve
Bodadeg ar Gouren / Fédération de Gouren	Mervent
Brezhoneg Bro-Redon	Mignoned ar brezhoneg
Brezhoneg e Brest	OpenStreetMap e Brezhoneg
Brezhoneg e Gwened	Poellgor "Bed niverel"
Bruzhoneg	Radio Bro Gwened
C'hoariva	Radio Kerne
Deskiñ d'an Oadourien	RAOK - Brezhoneg e Kreiz-Breizh
Dihun	Roudour
Div yezh	Sked
Divskouarn	Skeudenn Bro Roazhon
Diwan	Skol an Emsav
Edubreizh	Strollad 44=BZH
Emglev Bro an Oriant	Strollad Ai'ta!
Emglev Bro Gwened	Stumdi
Emglev Bro Karaez	Teenn – Ti ar Vro Sant-Brieg
Hent ar Furnez - Gwitreg	Ti ar Vro Kemper
Keit Vimp Bev	Ti ar Vro Landerne Daoulaz
Kelennerien war ar brezhoneg e rannvro Pariz	Ti ar Vro Leon
/ Association des professeurs de langue	Ti ar Vro Treger-Goueloù
Bretonne de Paris (KBP-APLB)	Yezhoù ha Sevenadur

Monsieur le Président du Conseil régional de Bretagne,

Suite à la publication de l'enquête sociolinguistique sur les langues de Bretagne conduite par TMO à la demande du Conseil régional, les associations œuvrant pour la langue bretonne se sont réunies le 13 octobre 2018.

Si le nombre de brittophones semble demeurer stable, en réalité le nombre de locuteurs recule et la moyenne d'âge augmente fortement ce qui induit inévitablement une diminution de la moitié des brittophones dans les dix à quinze prochaines années.

Aujourd'hui, la transmission de la langue se fait essentiellement par l'enseignement dans les écoles pour les enfants et les cours et stages pour les adultes. On constate aussi un début de renouveau encourageant dans la transmission familiale (10 % des jeunes brittophones).

Malgré un fort attachement à la langue bretonne de la part de la population et même si l'emploi en breton progresse, atteignant désormais 1500 emplois, la visibilité du breton dans la vie quotidienne et l'espace public reste faible, voire marginale.

La langue bretonne est en danger de disparaître à l'échéance de ce siècle si des moyens massifs, financiers et humains, ne sont pas engagés sans délai pour son avenir. Si des efforts ont été engagés nous constatons que ceux-ci sont insuffisants pour assurer la pérennité de la langue bretonne. Il est donc impératif de prendre immédiatement les décisions indispensables et de mettre en oeuvre les mesures nécessaires à la transmission et à la pérennisation du breton, notamment à travers la généralisation de l'enseignement bilingue. Au regard de l'enquête sociolinguistique, 73% de nos concitoyens vous soutiennent pour un enseignement accru du breton dans les écoles publiques, privées et associatives Diwan.

Les élus des 5 départements de la Bretagne, tous les élus, ont une responsabilité considérable dans la reconquête de la transmission de notre langue par les mesures qu'ils pourront prendre pour soutenir la demande sociale et obtenir de l'État les moyens de cette politique. Pour cela, comme un véritable plan d'urgence, nous vous demandons **dès 2019** de doubler le budget actuel du Conseil régional consacré à la langue bretonne, et de parvenir rapidement à 1% du budget régional global, ainsi que de :

- veiller au respect de la Convention spécifique pour la transmission des langues de Bretagne signée en 2015 entre l'Etat et la Région ;
- mieux reconnaître les spécificités de Diwan, celles-ci n'étant pas abordées dans la convention mentionnée ci-dessus ;
- conditionner les participations financières de la région à l'utilisation de la langue bretonne ;
- intégrer dans la Breizh COP un axe d'orientation transversal pour permettre à chaque habitant de Bretagne d'accéder à un enseignement du ou/et en breton et de pouvoir ainsi l'utiliser tant dans la vie sociale, économique et culturelle que publique ;
- concrétiser les propositions formulées lors des rencontres régionales de la langue bretonne du 15 octobre 2016 afin de renforcer le soutien aux mouvements associatifs et aux structures de langue bretonne.

Nous avons encore en mémoire votre conclusion de ces rencontres régionales :

*«... Nous prendrons notre place, nous savons que nous ne ferons pas tout tous seuls, nous ferons avec vous, ... soyez certains de notre ferme volonté et nous partageons le désir de langue que vous avez, nous allons le poursuivre et c'est un travail dont nous vous rendrons compte, régulièrement...»*

Forts de ce désir partagé pour transmettre la langue bretonne et éclairés par l'enquête TMO sur l'urgence de la situation, nous vous alertons sur le besoin de mesures fortes et ambitieuses dans le cadre de la nouvelle politique linguistique que votera le Conseil régional de Bretagne en décembre.

Nous vous assurons de notre volonté d'avancer ensemble et nous vous adressons nos salutations respectueuses.

Les signataires :

An Drouizig  
Ar Falz / Skol Vreizh  
Ar Redadeg  
Ar sklerijenn - Henbont  
Arvorig FM  
Bak e Brezhoneg  
Bannoù Heol  
Bod Kelenn  
Bodadeg ar Gouren / Fédération de Gouren  
Brezhoneg Bro-Redon  
Brezhoneg e Brest  
Brezhoneg e Gwened  
Bruzhoneg  
C'hoariva  
Deskiñ d'an Oadourien  
Dihun  
Div yezh  
Divskouarn  
Diwan  
Edubreizh  
Emglev Bro an Oriant  
Emglev Bro Gwened  
Emglev Bro Karaez  
Hent ar Furnez - Gwitreg  
Keit Vimp Bev  
Kelennerien war ar brezhoneg e rannvro Pariz  
/ Association des professeurs de langue  
Bretonne de Paris (KBP-APLB)

Kelenn  
Kelenomp !  
Kenstroll "brezhoneg e bro Roazhon" /  
Collectif "du breton dans le pays de Rennes"  
Kenstroll Breizh  
Kevre Breizh  
KLT  
Kreizenn Sevenadurel Vreizhek Abherve  
Mervent  
Mignoned ar brezhoneg  
OpenStreetMap e Brezhoneg  
Poellgor "Bed niverel"  
Radio Bro Gwened  
Radio Kerne  
RAOK - Brezhoneg e Kreiz-Breizh  
Roudour  
Sked  
Skeudenn Bro Roazhon  
Skol an Emsav  
Strollad 44=BZH  
Strollad Ai'ta!  
Stumdi  
Telenn – Ti ar Vro Sant-Brieg  
Ti ar Vro Kemper  
Ti ar Vro Landerne Daoulaz  
Ti ar Vro Leon  
Ti ar Vro Treger-Goueloù  
Yezhoù ha Sevenadur